

CANTIC SPIRITUEL

EN ENOR

DA SANT IAN BADEZOUR

Voar eun ton nevez.

Jesus, Mab d'an Tad Eternel,
Salver ar bed universal,
Roit din ho c'raç hac ho sicour
Da goms a sant Ian Badezour.

Zachari hac Elizabeth
Aoa e dat hac e vam hanvet,
D'an den voant exint a bep blam
Pa voant da sant Ian tad ha mam.

Elizabeth a voa coz bras,
He beza b t bugel biscoas,
Mæs dre ur c'hraç dreist an natur
E concevas e c'hrouadur,

E guir priedou e vevent,
Huml voant ha parfet evel sænt,
Bemde e suplient Doue
Ma roje deze bugale.

Pa voa Zachari en ilis
O ofr da Zoue ar sacrific,
E ligaçs Doue an Tat,
Un Æl dezan gant quelou mat.

Ebars en tu deou d'an auter.
E tisquennas ar messenger,
Hac e laras da Zachari,
Ema graç Doue en ho ty,

Exaucet eo bet dech ho peden,
Doue a ro deoc'h ho coulen ;
Ho priet, quent nemeur ahan,
En devo ur unab hanvet Ian.

Ar ma-bze a ur sant bras,
Ur precursor d'ar Messias :
Ar c'hraç en devo da velet,
Nep a dle redimat ar bet.

Gabriel a zisparissas,
Elizabeth a goncevas
Ur mab etre e daou goste,
Precursor dan Autrou Doue.

Pa voa santez Elizabeth
O touguen sant Ian biniguet,
E teuas ar Verç'hes Vari
Evit renta bezi dezi.

Mari a zougue d'ar c'houlz-ze
En e entrailiou Mab Doue :
Dout voa abers ar Sp'et-Glan,
Da lettel ar pec'her a boan.

P'en devoa Mari saludet
He c'hiniter Elizabeth,
Ha discuet dezi ur joa bras
Daou miracl caër a c'hoarvezas.

Sant Ian e cof Elisabeth,
Gant joa a commanças lamet
Evel pa vize d'an daoulin
Da saludi he vestr divin.

Ouspen a voa sanctifiet,
Delivret demeus ar pec'het,
A ro deomp hon tad hon mam,
Balamour d'ar pec'het Adam.

Piou na gompreno quet a han
An excellanç eus a sant Ian,
Gret voa gant Doue eur sant bras
Hac en ne voa quet ganet c'hoas.

Pebes joa da Elisabeth :
Pa c'hanas he mab biniguet :
Cavet Jesus en e c'hichen,
Redemptour an natur humen.

N'em eus nep douët evit avanç
E voa en Ev rejouissanç,
Hac e cane an oll Ælez
Da sant Ian canticou nevez.

Pa zeo Jesus roue ar c'hloar
Deut eus an Ev var an douar,
A zisqueze dre e bresane
Cals demeus a rejouissanç.

Zachari a voa mut rentet
Balamour ur'ea devoa douët
Da gomzou an Æl Gabriel
Messenger an Tad Eternel

Mæs sant Ian pe zeo bet ganet
Ar goms d'e dad en deveus roet ;
Rac chetu aman e gomzo :
Ian emezan eo e hano.

Entre ar bugale malet
So biscoaz gant groaguez ganet
N'en deus quet bet hepquen unan
Brassoc'h evit ma zeo sant Ian.

Jesus-Christ pa voa var ar bet
Eo en deveus e lavaret,
Ne gred, hon Salver pa gomzo
Avezo credet hep testo.

Sant Ian biscoas ne reas pec'het,
Ha ras pinijen bras bepret ;
Paourente poan, humilite,
N'en deus bet quen en e vue.

N'en devoa quen evit dillat
Nemet croc'hennic eun danvat
E deliciussa cheriou
Voar dour seler ha grizon douzou.



E vele oa an douar yen,
E dy er meas, e bluec men,
E tapis hac e linceffiou,
Ne voant nemet spoe ha deilliou.

E compagnenez al loenet
Bleizi. moc'h guez ha leonet,
E jardiniou d'en em bourmen,
Coajo drez, spern, dour a bouilleh

Concluomp eta, christenien,
Eo necesser bras ar binijen,
Pa zeo eun den quen innoçant,
A souffr quement all a dourmant.

Sant Ian en deser er guiz-ze,
Ne re nemet pedi Doue,
Ha gortos gant eun desir bras,
Done diguez ar Messias.

Mæs pa voa arru an termen,
Da brena an natur humen,
E quittas sant Ian ar c'hoajou,
E vit mont dar zermou dre'r vro.

Da laret d'an dut disordren,
E voa ret ober pinijen,
E vit prepari an henchou,
Da ziguemeret an Autrou.

Ar brut mat demeure e vuhe,
E squiant, e autorite,
A re d'an dut a b b canton,
Donet d'e glevet o sarmon.

E sellou voa quer charmant,
Quen douc e goms, quen ravissant,
Ma songent oll bian ha bras,
Penaus voa hen ar Messias.

Bete memes ar Jusevien,
A zeputas a beleyen,
E vit mont da c'houlou outant,
Hac ar c'hriste a rer a nezan ?

Mæs en en deveus respontet,
Ne voa Christ, nac eur Prophet,
Nemet ur vouez en eur dremen,
O laret ober pinijen.

Sant Ian, deac'h ma tremene,
Ouspen sarmon e vadeze,
Gant e gonjou e yent contant,
Da sench a caout badiziant.

Ha voa o sarmon evellen,
E quichen bord rivier Jourdren,
E teuas Jesus e unan,
Da veza badezet gant Ian.

Sant Ian en instant m'er guelas,
Ous e anaout en disculas,
Heman, emezan, eo an oan,
A lammo ar pec'her a boan.

En zo bet deomp prometet
Gant quement eus a Prophedet :
Chetu aman an oan Doue :
Ho Mest, ho C'hrouer, ho Roue.

Plou a comprenas biscoas
Humilite ar Messias,
Pa bligeas gantan er Jourdren,
Monet e renq ar bec'herien.

Da effaci ar pec'hejou
E ve gret ar badianchou,
Mæs Jesus, hac en innoçant,
A recevas a badiziant.

Chetu amant traou surprenant
Hac a ra din coll ar parlant,
Guelet Jesus humiliet
Dirac nep en devoa crouet,

Jesus hor mæstr, roue a c'hloar.
A so prosternet d'an douar ;
Mæs Ian o rei ar badiziant
So enoret evel ur sant.

Jesus a so voar e saoulin.
Hac en ur personiacu divin,
Jesus a so e plac ar pec'her,
Ha Ian a so e plac hor Salver.

C'hui, sant Ian p'ho poe an enor
Da badein hon Redemptor,
A remerquas a euc'h e benn
Ar Speret-Santel o tisquenn.

C'hui glevas en Tad Eternel,
O ansao eno e Vuguel :
Hennes eno ma Mab, emezan,
Ma filjadur a zo ennan.

Sant Ian p'en devoa badezet
Jesus hor Salver binniguet,
A yas pa pales Herodes,
D'e vlam eus e aoultries.

Mæs ar Roue Herodias,
Ous sant Ian en em goleras.
Hac a ras dre suasion
Lacat anezhan en prison.

Pa voa ar Roue un devez
O leina e compagnuez,
E teuas merc'h ar plac'h flamant
Da ober eun dans dirazan.

Ar Roue neuze a larras
D'ar Verc'h ze da Herodias,
Goulen eun dra benac outan
Hac e devize anezan.

Gant he mam ar plac'h quelenet
Penn sant Ian e deus goulennet ;
Troc'het voe er prison e benn,
Ha roet dezi he goulen.

Sant Ian, breman ez oc'h er gloar,
Goude ho poan voar an douar :
Hoc'h assistanç a c'houlennomp,
Ho pezet sonch eus ac'hanomp.

Hor preservit ous an teir goalen,
Bresel, quernee hac ar vocen,
Dre ho pedennou deiz ha nos
Hor c'honduet d'ar Barados.